

# HON OFERENN

STUDI HAG OBER

NIVERENN 14

HANV 1941

Studi hag Ober

Niverenn 14

HAN̄V 1941

# HON OFERENN

embannet

gant

Strollad Studi Hag Ober

gant Aotre Eskopti Sant Brieg

Pep gwir miret striz —————

Kinniget d'ar re  
a glask hent ar  
— VUHEZ —

## D I V E R R A D U R

Beva an oferenn . . . . .	5
Ar Ragoferenn . . . . .	16
Ar C'hinnig . . . . .	21
Ar Sakridigez . . . . .	28
Ar Gomunion . . . . .	35



# BEVA AN OFERENN

Perak ez eus tud ha ne gav ket d'ezo o dije ezomm eus an oferenn ?

Perak ez eus kristenien a gav hir an amzer tremenet en Iliz ha ne zeuont betek enni nemet dre ma vez gourc'hemennet striz hen ober ?

**Ne gomprenont ket an oferenn.** Ha chom a reont diseblant, disoñj, dizober, evel ma n'o dije netra da soñjal nemet lezel o spered da redek ermaez, netra d'ober nemet gortoz ar fin.

**Ne garont ket an oferenn,** dre ma ne vez evito nemet eun oberenn a relijion a chom en diavaez d'one ha d'o buhez. **NE VEVONT KET AN OFERENN.**

Ha ken frealzus eo koulskoude karout an oferenn, ken konfortus he c'hompren ha beva diouti.

Met ne garomp eun dra bennak nemet pa 'z eo deuet da veza hon tra-ni. Ha c'houi, ne garoc'h an oferenn nemet gant ma teuio da veza **HOC'H oferenn,** dre lida anezi gant ar beleg, **dre lakaat enni ho puhez,** ha **dre lakaat anezi en ho puhez.**

« **HO PUHEZ EN HOC'H OFERENN** » hag « **AN OFERENN EN HO PUHEZ** », setu an diou lavarenn a zispleg petra 'dle beza unvaniez hon oferenn hag hon buhez, setu an diou lavarenn-stur a glasko al levrig-mañ o diskleria, d'eoc'h d'o c'hompren ha da veva diouto da vat.

## KOMPREN AN OFERENN.

Hogen evit kompren an oferenn, eo ret kompren petra eo. Daoust hag hoc'h eus komprenet, zoken eur wech hepken, petra eo ? Daoust hag hoc'h eus klasket kompren ?

Lavaret eo bet d'eoc'h ez eo **SAKRIFIZ JEZUZ KRIST**. Met petra a dalveze ar c'homzou-se evidoc'h ? Sakrifiz Jezuz Krist ? Daoust ha ne gav ket d'eoc'h e vije eun dra dremenet da vat, peogwir ez eus daou vil vloaz pe dost, ma 'z eo bet marvet Hor Salver war ar Groaz.

N'hoc'h eus ket soñjet avat, **e chom bepred e kalon Jezuz, ar mennadou hag ar soñjou a oa e re pa varve war ar C'halvar**, n'hoc'h eus ket soñjet e chome ganti da viken ar memes karantez en deus diskouezet neuze d'e Dad, ar memes kasoni ouz ar pec'hed, ar memes truez ouz ar bec'herien, n'hoc'h eus ket soñjet e talc'he ar mennadou-se da veza ken beo ha ken kreñv en e galon da viken. **SAKRIFIZ JEZUZ A CHOM BEPRED EN E GALON AR MEMES HINI**. Sakrifiz Jezuz Krist a bad da viken.

**N'eus nemet an doareou-diavaez a vez disheñvel etre an oferenn ha sakrifiz ar Groaz.**

War ar C'halvar, e oa lazet Jezuz gant ar Judevien hag ar soudarded roman. Skuilha a reas neuze e wad evit gwir, betek an divi, betek an dakenn diweza, mervel a reas.

**Bremañ en oferenn, ne varv ket Jezuz**. Ne c'hell ken mervel, beo eo bremañ da viken en neñvou ; ne c'hell ken an Ankou nag ar boan kaout krog warnañ.

Emañ e wad o redek hag o lammat en e wazied, beo ha lugernus, ha n'hall ken beza dispartiet diouz e gorf.

War an aoter eo skeudennet hepken Sakrifiz ar Groaz, degaset eo d'imp ar soñj dioutañ. Setu penaos. Skeudennet eo d'imp sakrifiz ar Groaz gant komzou ar Sakridigez (Konsekrasion), a laka dre o nerz ar bara da veza korf Hor Salver, ar gwin da veza e wad. Evel just, dindan pephini eus ar spesou, emañ Jezuz gant kement a zo dioutañ, rak, evel hon eus lavaret, n'hall ken e wad beza disrannet diouz e gorf. En oferenn koulskoude, **n'emañ Jezuz dindan spes ar bara nemet en abeg d'e gorf, n'emañ dindan spes ar gwin nemet en abeg d'e wad**. Hag evelse eo skeudennet disparti gwirion e gorf diouz e wad a voe gwechall doare Sakrifiz ar Groaz war ar C'halvar.

**AN OFERENN EO SAKRIFIZ AR GROAZ SKEUDENNET D'IMP A-C'HOUEDE**, evel ma oa sakrifiz ar Gambolid e-pad ar pred diweza a lidas Jezuz gant e ebestel araok mervel, ar skeudenn en araok eus sakrifiz ar Groaz.

An oferenn eo eta Sakrifiz ar Groaz **addispleget war an aoter hag addiskleriet d'imp**.

## HOR SAKRIFIS-NI.

Ha perak e venne Hor Salver lakaat Sakrifis ar Groaz da veza addispleget evelse a-hed ar c'hantvedou da zont, dirak rummadou ar Gristenien ?

Aes eo kompren perak.

**Pa 'z eo marvet Jezuz Krist war ar Groaz, e varve evidomp ; en em lakaet en doa en hol lec'h, lec'h an**

den pec'her ; paea a rae hon dle, en hon ano. **Ha koulskoude, ne oamp ket eno evit en em unani gantañ, evit kinnig anezañ** evel an dic'haou dleet d'hor pec'hedou.

Met ar pezh en deus graet Jezuz evidomp hag en hól lec'h, e oa ret d'imp-ni, Kristenien, en eun doare bennak, her c'hemer war hon ano, hel lakaat da veza hon tra-ni. **Evit se en deus Hor Salver diazezet an oferenn, evit ma c'hellimp-ni d'hon tro, kinnig ar Sakrifis en doa profet en hon ano, evit ma lakaimp anezañ da veza hor Sakrifiz.**

Daoust hag hor boa komprenet se ? Daoust hag hor boa sonjet e tleomp en em unani gant hor Salver en e Sakrifis, hag ober eus mennadou ha soñjou e galon hor mennadou ha soñjou-ni ? Daoust hag hor boa komprenet e tleomp e-pad an oferenn **E GINNIG HAG EN EM GINNIG GANTAN ?**

Daoust hag e c'hellomp chom diseblant p'emañ addiskleriet dirazomp ar pezh a zo tra pouezusa buhez ar bed a-viskoaz, **Trec'h Jezuz war ar pec'hed hag ar maro**, oberenn veur hor Silvidigez ?

C'hoarvezet eo bet d'imp kaout dispar oberou bras roueed, mistri-broïou, soudarded veur, ha chom souezet dirak taolenn o buhez, met petra eo se e kichen trec'h Hor Salver war ar pec'hed hag ar maro ?

Marteze, c'houi hoc'h unan, hoc'h eus kemeret perzh en eun oberenn a c'houlenne kalon ha nerz, ijin ha poell, ha lorc'h ha stad a zo ennoc'h pa lavarit : « Me eo an hini en deus graet an dra-se » pe « Aze edon me ivez ».

Mar bevit an oferenn en eur ginnig Sakrifis Jesus e c'hellit lavarout diarbenn oberenn vrasa an Istor,

an oberenn he deus goulennet ar muia a nerz, a galon, a ijin hag a spered : « **Aze edon me ivez ; Kemeret em eus perzh enni** ». Mar bevomp an oferenn e teu gloar Jezuz da veza hor gloar.

Komprenet hoc'h eus bremañ penaos, pep gwech ma teu eur c'hristen d'an oferenn ez eo **evit kinnig d'an Aotrou Doue, ganedigez, buhez, poaniou ha maro Jezuz** hor Dasprener.

Komprenet hoc'h eus penaos, pep gwech ma teu eur c'hristen d'an oferenn ez eo **evit en em ginnig gant Jezuz, Kinnig e vuhez-heñ, e boaniou, e labour, e vuhez betek e varo** pa blijo d'an Aotrou Doue.

Komprenet hoc'h eus e tleit en oferenn **en em unani gant Jezuz Krist**, e ginnig hag en em ginnig gantañ, e ginnig evel ma en deus-heñ kinniget ac'hanoc'h war ar Groaz, gant kement tra vat hoc'h eus graet hag a reoc'h en ho puhez.

#### **SAKRIFIS HOR BUHEZ PEMDEZIEK.**

Rak ho puhez pemdeziek a dle mont e-barz an oferenn da veza kinniget : **ho labour-tiegez, ho micher, diaasteriou ar sizun, ho levenez.**

**Ho puhez pemdeziek a vez etre diou oferenn** : an oferenn dremenet he deus kinniget anezi en araok, hoc'h oferenn da zont a ginnigo anezi dremenet.

Daoust ha ne dleit ket kaout soñj eus an oferenn hoc'h eus lidet er sul dremenet. **Kement a vevit bremañ, hoc'h eus dija profet anezañ dre zaouarn Jezuz.**

Daoust ha ne dleit ket lakaat dirak ho taoulagad hoc'h oferenn genta da zont ? **Ar vuhez a vevit bremañ, hag-heñ ne vo ket an hini a ginnigoc'h disul kenta dre zaouarn Jezuz ?**

Mont d'an oferenn a zo eur jestr a dalv da verka dirak an Aotrou Doue, e lakait da veza ho peadra c'houi soñjou ha mennadou Kalon Jezuz, e garantez evit kement tra vat, e gasoni ouz ar pec'hed.

Goude beza kemeret perz, disul diweza, e sakrifis hor Salver hag o c'hortoz adarre, disul kenta, e saludi en e drec'h meur a enep ar pec'hed, daoust hag e c'hellit lavarout ar gomz divalo-mañ, lenn al levr hudur-se, beza displeal en ho micher, beza drouk e-keñver an dud all, kaout kasoni ouz ar c'hristen-mañ a vez unanet ganeoc'h er bedenn hag e gras Jezuz ?

D'an hini a gompren an oferenn, pegement a bouez n'he deus ket hi war e vuhez pemdeziek. **Hoc'h oferenn a dle kaout levezon ha nerz war pephini eus hoc'h oberou,** stumma anezo diouti, sachha ho soñjou d'he heul, ren ho karanteziou.

**Mar bevit an oferenn, setu ar pezh a c'hoarvezo ennoc'h.**

Evel an heol a laka pep tra da greski ha da frouezia, e vo hoc'h oferenn ar sklerijenn a lakaio ennoc'h reizder ha madelez, an hini a splanno bepred war ho kalon ha war ho reiz.

Hoc'h oferenn a vo evidoc'h al levezon miret atao ennoc'h ha skuilhet war pep tra. Neuze e hañvalo d'eoc'h beva en eur bed nevez ; an oferenn a vezo neuze evit hoc'h ene, nerz ha stur.

## SAKRIFIS AN ILIZ.

Jezuz a anav hor sonjou mat evel hor pec'hedou. War ar Groaz edont dirak e zaoulagad. Anavezout a

rae sklaer pephini eus doareou hor buhez. Hon oberou mat, o c'hinnig a rae d'e dad ; hon oberou fall, paea a rae evito gant e boaniou. Hon dougen a rae en e zaouarn d'hor profa gantañ e-unan.

Ha petra 'felle d'ezañ nemet hor sachha war e lere'h ? Deuet eo hor Salver war an douar da entana ar bed gant flamm ar garantez, ha petra 'fell d'ezañ nemet e krogo an tan a bep tu ?

Met e soñj Jezuz n'omp ket hon unan. En e soñj emañ e iliz sakr, **an holl eneoù santel o deus bevet war an douar, a vev hag a vevo warnañ.** Kinnig a ra anezo holl da veuleudi e Dad, goulenn a ra diganto holl en em unani gantañ.

**Hor Sakrifis eo an hini bet profet a holl viskoaz gant an holl Sent,** an hini a oa skeudennet en araok gant sakrifisou an Testamant koz, an hini o deus c'hoantaet Sent al lezenn goz gallout lida war an douar. Hor Sakrifis eo an hini o deus kinniget ar Werc'hez Vari ha Sant Yann ouz troad ar Groaz, en endervez ar Gwener Sakr, an hini o deus profet an holl gristenien, an holl Sent bet tremenet war an douar adalek an Ebestel vinniget, ar verzerien, ha Tadou an Iliz.

**Hor Sakrifis eo hini an Iliz o vev bremañ war an douar.** Ar beleg ne lid ket an oferenn evitañ e-unan, met en ano an iliz a-bez, en ano ar Pab hag an Eski-bien, en ano kement ene kristen a vev bremañ e gras Doue, en ano ar re a heuilh lezenn an Iliz. Ar beleg a lid an oferenn en ano ar gristenien a zeu pep sul en ilizou ar bed holl da brofa ar memes Jezuz, en ano ar re a zeu en iliz ar barroz d'en em voda en dro d'ezañ, en ano ar re a ro aluzon d'ezañ evit e

vevañs, en hoc'h ano-c'houi a gemer perz en e oferenn.

**An oferenn eo Sakrifik an Iliz o kinnig Jezuz hag o 'n em ginnig da Zoue gant Jezuz.** An oferenn eo an Iliz o respont da c'houre'hemenn hor Salver : « Grit d'ho tro ar pezh am eus graet en hoc'h ano ». An oferenn eo an Iliz o 'n em rei da Zoue an Tad dre zaouarn Jezuz, an oferenn eo an Iliz o sevel Jezuz en he daouarn war du an neñv, a-hed ar c'hantvedou.

#### **EVEL EN EUR PEZ-C'HOARI.**

Kompren a rit bremañ n'hoc'h ket en oferenn evit sellout hepken pezh a dremen, met ivez evit ober. **Ho roll hoc'h eus da gas da benn,** evel ma ra eur c'hoarier en eur pezh-c'hoari.

Evel ma klask eur pezh-c'hoari addisplega dirazomp eun dra dremenet bennak, **e vez an oferenn e giz eur pezh-c'hoari santel,** hini maro Jezuz war ar C'halvar addispleget dirazomp ha skeudennet dindan hon daoulagad.

Nemet amañ eo klokoc'h ha parfetoc'h an traou eget er peziou-c'hoari all ; amañ n'eo ket kleuz ar skeudenn peogwir e vez lakaet etre hon daouarn gant an oferenn, Jezuz ostiv ar c'halvar, hag e vez roet d'imp ganti ar c'hras en deus gounezet evidomp hor Salver gant e varo.

**Evel eul leurenn-c'hoari emañ ar santual** gant an aoter en e greiz, savet uhel evit ma welo pep hini pezh a vez lidet warni.

**En dro d'an aoter emañ tud ar c'hoari :** unan

anezo **an hini penna, a chom diwelus d'imp :** Hor Salver Jezuz Krist ez eo, ar beleg meur hag an ostiv meur. Ar re all a vez dindan hor sell : ar beleg gant ar gristenien en dro d'ezañ.

**Gant ar beleg emañ ar roll hira,** d'ezañ da lakaat da dremen ennañ holl nerz e galon pep ma tispleg anezañ en e gomzou hag en e jestroù. **Beva** a ra e oferenn.

**Nemet komz a ra en hoc'h ano.** Ha diganeoc'h e c'houlenn oberia gantañ, pedi gantañ. Trei a ra war du ennoc'h da c'houlenn diganeoc'h en em unani gantañ, asanti d'ar pezh en deus lavaret.

**D'eoc'h c'houi eo da respont d'ezañ** da verka hoc'h asant gant an Amen, d'eoc'h eo heulia ar pezh a ra en eur sellout outañ, ha klask kompren ar pedennou a zibun en hoc'h ano.

Dleout a rit eta en em lakaat a wel d'an aoter, ha n'eo ket mont da guz evel eur paourig kaez en eun toull bennak pe a-dreñv eur pilher.

**Klask kompren jestroù ha komzou ar beleg, asanti outo,** pedi gantañ hag eveltañ, setu ho roll-c'houi.

#### **LODENNOU AN OFERENN.**

An oferenn-se a fell d'eoc'h bremañ lida gant ar beleg, penaos emañ an doare anezi ?

Ret eo gouzout da genta ez eus en oferenn **diou lodenn vras :** AR C'HELENNADUR hag AR SAKRIFIS.

1<sup>o</sup> Adalek ar penn kenta betek fin ar Gredo emañ **ar C'helenhadur,** anvet c'hoaz ar **Ragoferenn,** a zo anezañ lennadurioù, kentelioù paramantet gant pedennou ha kanennoù.



Daoust d'al lodenn-mañ kaout nebeutoc'h a dalvoudegez eget ar Sakrifis, ez eo graet koulskoude evit aoza hon ene hag e lakaat da sevel war du an aotrou Doue, dre selaou kentelioù sakr, **evit ma vimp kempennet mat da lida ar sakrifis da c'houde.**

2<sup>o</sup> An eil lodenn vras eo ar Sakrifis. Houmañ eo an oferenn da vat, ar mister santel. Hag evel ma 'z eus en eur pezh-c'hoari meur a arvest, ez eus amañ ivez teir lodenn.

1. **Ar c'hinnig pe ofertouer**
2. **Ar sakridigez pe gonsekrasion**
3. **Ar gomunion**

Setu an teir oberenn a dleomp a bep eil kas da benn, an tri jestr a dleomp diskleria, an tri emzalc'h a lakimp a bep eil gant hon ene.

**Eus fin ar Credo betek ar ganenn-veur emañ ar C'hinnig.** Ar beleg, oc'h aoza war an aoter ar bara hag ar gwin, a ginnig anezo evit holl dud an iliz, evit o silvidigez, en eur c'houlen war eun dro digant an Aotrou Doue, ma tegemero ar bara hag ar gwin-se o trei anezo e korf hag e gwad Jezuz.

**Eus ar ganenn-veur betek ar Pater emañ ar Sakridigez** ar Bedenn-veur, ma vez sakret ganti ar bara hag ar gwin da gorf ha da wad hor Salver. Lodenn greiz ar Sakrifis ez eo hag al lodenn uhela.

**Eus ar Pater betek fin an oferenn ez eo ar Gomunion,** an Unvaniez, lec'h e kemer pep hini e lod eus ar gwin hag ar bara bet sakret, evit resev en e ene leunder ar c'hras a zo frouez Sakrifis Jezuz. N'eus ket oferenn hep komunion : komunia eo kemer perz da vat en oferenn.

Gwelet hoc'h eus ez eus en oferenn pedennou dis-henvel evit pep sul, ha pedennou a chom ivez atao an hevelep re.

Ar pedennou a cheñch pep sul a vez anvet « **ar pedennou kemmus** ». Ar ragoferenn, lec'h ez eus da skouer eun **abostol**, eun **aviel** ispisial pep sul, a ra dreistholl gant ar pedennou kemmus.

Ar pedennou a chom bepred an hevelep re a vez anvet « **ar pedennou digemm** ». Pedennou ar Sakrifis a vez digemm al lodenn vrasa anezo.



# AR RAGO FERENN

## AR COFES OUZ TROAD AN AOTER.

Daoust hag hoc'h eus sellet mat penaos e krog an oferenn ?

Ouz troad an aoter, goude beza daoulinet e stag ar beleg gant **Sin ar Groaz** : « En ano an Tad, emezañ, hag ar Mab, hag ar Spered Santel », rak gant an oferenn emañ o vont da bedi, da veuli, da azeuli tri ferson an Dreinded.

Ha goude sin ar Groaz, setu ma tribun a bep eil ar beleg hag ar responder, **gwerzadou ar psalm « Judica me »**, a dalv da lavarout « Va barnit, Aotrou, ha dirannit va c'haoz diouz hini ar bobl dizakr ». Hag e tisplegont **ar Confiteor** gant izelegez-kalon, gant glac'har dirak nammou o ene, gant fiziañs e trugarez an Aotrou Doue.

Ar responder en deus displeget d'e dro ar Gonfiteor evitañ hag evidoc'h. Goulennet en deus pardon en hoc'h ano.

Ha c'houi ? **Sellit en hoc'h ene.** Hag-heñ n'hoc'h eus ket pec'het enep Doue ?

Er sizunvez tremenet, penaos hoc'h eus renet ho puhez ? Kristen e oa pe ne oa ket ? Ho pedennoù ?... Hag-heñ hoc'h eus bevet gant Doue ? Petra hoc'h eus graet evit rouantelez Jezuz Krist **en ho tiegez, en ho micher** ? Penaos hoc'h bet, eun abostol pe eun den laosk e galon ?

Disammit bec'h ho pec'hedou, ha pignit bremañ skañv ha laouen davit Doue, evel ar beleg a sav war leurenn an aoter.

## MEULEUDIOU HA PEDENNOU.

Lenne a ra bremañ ar beleg ouz korn an aoter, an **Introit**, ar pez a dalv « **an Digor** ». Eun tamm psalm ez eo a vez kanet en oferenn bred e-pad ar Gonfiteor, ha graet eo evit hon lakaat adalek ar penn kenta e ton an oferenn a lidomp ; an Digoradenn a ro d'imp **eun diverra eus ar soñjou a dleomp kaout e kerz an oferenn-mañ-oferenn.**

Hogen penaos pedi ervat hep sikour ha skoazell an Aotrou Doue : « **Kyrie eleison** ». Goulennomp e c'hras digantañ « **Aotrou, ho pezet truez, Tad, Mab, ha Spered glan** ».

Hag e c'hellimp neuze, Aotrou, ho meuli gant an Aeled : « **Gloria in excelsis Deo** ». « Gloar da Zoue e lein an neñvou ha peoc'h war an douar d'an dud a volonteiz vat ».

Bremañ ez omp staget da bedi, hag e c'hell ar beleg dastum pedennoù an holl, en eur ziskleria en hon ano, ar **bedenn a-unvan**. Setu an Iliz hag a oar mat gwir ezommou hon eneoù, o pedi evidomp. Ha ni, pedomp ganti ; greomp eus pedenn ar beleg hon pedenn-ni : e strollad an Iliz emamp, evel eur breur e-touez e holl vreudeur, o kavout ar memes kalon, ar memes mouez ganto, hini an Iliz.

## KENTELIOU AR FEIZ.

Diou gentel a vez en oferenn.

En eur gentel genta e klevomp mouez eun Abostol o prezeg d'imp Jezuz Krist hag e vertuziou. Setu perak ez eo anvet ar gentel-se, **an Abostol**. Peurliesañ e vez tennet ar pennad, eus lizerou Sant Paol.

Selaouomp mouez Sant Paol, ar vouez entanet-se he deus tregernet dre ar bed o prezeg Jezuz, a gav adarre evidomp nerz ha ton war vuzellou an Iliz. **D'eo'h-c'houi bremañ eo degaset komzou ar silvidigez-se.**

A-wechou koulskoude, e-lec'h eur pennad eus an Testamant nevez, ez eus evit ar gentel genta, unan tennet eus an Testamant Koz, da skouer evit gouel ar Rouaned, ez eus eur pennad tennet eus ar Profed Izaiaz.

Goude beza selaouet an Abostol, kanomp ha tridomp a levez gant ar **Gradual** hag an **Alleluia**, rak hon ene a fell bremañ d'ezañ, degemer da vat komzou ar vuhez : prest omp da glevout an Aviel.

**War sav en em lakaer** gant resped, evit selaou komzou **an eil kentel : an Aviel**. Setu bremañ kelenadurez Jezuz Krist bet miret d'imp gant an ebestel hag an diskibled genta, setu ar c'homzou en deus lavaret d'ar bed e-pad an tri bloavez ma renas e vuhez-prezeg.

Daoust hag hon eus klasket **kompen an Aviel**, e sanko en hor spered, ober dioutañ en hor buhez.

Evit diskleria d'imp pezh hon eus lennet ha kanet, e pign ar beleg er gador-brezeg. Na glaskomp ket en e gomzou flourded, nag helavarded, met gwirionez Doue.

Kement kelenadurez degaset d'imp gant gouelioù ar bloaz kristen, a en em gav berr ha berr er **Credo**. Setu aze dastumad holl wirioneziou hor feiz, a dleomp skriva doun en hor c'halon ha karout gant hon holl ene. **Kanomp anezi evel testeni hor feiz**, rak ar c'homzou-se a zo pennlavarou ar wirionez peurbadus.

Pignet omp pazenn ha pazenn, betek barr ar feiz. Dare omp bremañ da lida ar Sakrifis, lec'h e savo hor c'harantez war du Doue d'e veuli, lec'h e tigorimp hon ene d'ar c'hras gant an esperañs, da resev puilher donezonou an neñv.



## AR SAKRIFIS

Da noz ar Yaou-Gambrlid, e-pad ar pred diweza a zebras gant e ebestel, e kemeras hor Salver eun tamm bara hag eur c'hop leun a win, e vennigas anezo en eur lavarout : « Kement-mañ eo va c'horf, kement-mañ eo va gwad ». Hag e roas anezo d'e ziskibien.

Ha diwar gourc'hemenn Jezuz en deus lavaret : « Grit evelse, o terc'hel soñj ac'hanoun », setu endeeun ar pezh a ra ivez ar beleg :

1° **Kemer bara ha gwin** d'o lakaat war an daol santel, war an aoter.

2° **Benniga ha sakri** anezo.

3° **Rei anezo da zebri** d'ezañ e-unan ha d'e vreurdeur.

An ober kenta eo **ar C'hinnig**, an Ofertouer.

An eil, eo **ar Sakridigez**.

An trede, **ar Komunio**.

## 1° AR C'HINNIG

**Kemer ar bara hag ar gwin, hag o c'hinnig d'an Aotrou Doue**, dre lakaat anezo war an aoter, setu petra eo an Ofertouer.

Goude beza kroget er bladenn, ar varaenn warni, ar beleg a sav anezo en e zaouarn evit profa an ostiv d'an Aotrou Doue, ha goude beza pedet e poz anezi war al lienenn-gorf.

Gwelet hoc'h eus penaos e tiskenn neuze ar beleg gwin en e galir, hag er gwin eul lommig dour, evel ma reas hor Salver er pred diweza, rak gwech ebet ne eve ar Judevien gwin pur, hep lakaat ennañ eur bannac'h dour.

Setu eta ar bara hag ar gwin aozet war an aoter ha pozet da vat warni. Bremañ ne servijint ken nemet d'ar sakrifik ; aet int ermaez eus an implij disakr evit tremen dija da santel ; **n'int ken d'an den, met da Zoue**.

Ha petra dalv da verka ar jestr-sê, petra ? nemet diskleria emañ an Iliz oc'h en em rei a-grenn gant kement a zo anezi, nemet diskleria an donezon a reomp ac'hanomp-ni da Zoue, nemet diskleria hor c'hoant da veza sakret ni ivez e Jezuz Krist.

### DONEZON AN ILIZ.

Ar bara hag ar gwin a zo eta donezon an Iliz, da lavarout eo an Iliz oc'h en em rei drezo da Zoue.

Talvezout a reont evidomp-ni, da ziskouez e fell d'imp beza cheñchet e Jezuz Krist, en em rei a-gevret gant Jezuz en e Sakrifis, hag evelse kaout perz en e silvidigez, en e c'hras hag en e c'hloar peurbadus.

Talvezout a ra evidomp ar bara hag ar gwin, **evit an Iliz a-bez**, evit kement ene kristen a vev e stad ar c'hras, eus kement bro, eus kement yez, tud vras ha bihan, koz ha yaouank : eur bobl santel eo an Iliz, bet dastumet eus pevar c'horn an douar da veza **eur rouantelez sakr, gant ar memes Krist d'he ren, d'an holl da veza stag outañ, gant ar memes Doue da veza meulet gant an holl.**

Evel ar bara hag ar gwin, o veza lakaet war an aoter, a vez tennet eus an implij disakr da zont da veza santel, evelse ivez gant ar vadeziant, eo bet tennet ar Gristenien eus a douez an dud all disakr ha dalc'het c'hoaz gant ar pec'hed, evit tremen da bobl santel ha da rouantelez an Aotrou Doue.

Lakaet e vez ar bara hag ar gwin war an aoter evit ma vint sakret e Jezuz Krist e-unan gant komzou ar bedenn-veur. Ni ivez badezet, e tleomp dont da veza heñvel ouz ar C'hrist, Kristed nevez. **Beza e tleomp beza sakret e Jezuz Krist.** Ha setu pezh a c'houlennomp gant ar c'hinnig.

Penaos beza unanet gant Jezuz, nemet e vefemp unanet gantañ en e sakrifis hag en e c'hloar.

**Beza unanet gantañ en e sakrifis,** lakaat ennomp soñjou ha mennadou kalon sakr hor Salver, mervel ni ivez d'ar pec'hed evit en em rei d'ar reizder ha d'ar mad, penaos e c'hellimp hen ober gwelloc'h hag aesoc'h, nemet ma ve addiskleriet dirazomp sakrifis ar Groaz, ha setu perak e teuo ar bara hag ar gwin-se da veza korf ha gwad Jezuz, da veza e sakrifis

ado'hraet war an aoter, d'imp-ni da vont ennañ. Kemer perz e Sakrifis hor Salver, setu eta pezh a c'houlennomp gant ar c'hinnig.

**Beza unanet gantañ en e c'hloar,** beza treuzfurmet ha troet e Jezuz leun a c'hras hag a vuhez peurbadus, Jezuz mestr an neñv hag al levez da zont, setu pezh a c'houlennomp ivez gant ar c'hinnig. Hag evit gwir, ar Jezuz a zeuio war an aoter, an hini ma vo sakret ennañ hon donezonou, daoust ha n'eo ket ar C'hrist a vev hag a ren en neñvou da viken. Ra zeuio eta, heñ roue an neñv, ma c'hellimp kaout ennomp froueziou e Sakrifis, ma resevimp e c'hras a builh, ma vimp eun deiz degemeret en neñvou gantañ.

**O lakaat eta ar bara hag ar gwin war an aoter, e sellomp war raok,** klask a reomp eun dra bennak **en tu hont d'ar bara ha d'ar gwin dister-se.** Klask a reomp mont ganto betek e sakrifis hag e gloar Jezuz.

Petra dalvezfe d'imp kinnig bara ha gwin d'an aotrou Doue ma ne vefe netra ken goude-se. Eur jestr aner e vefe hep efed ebet. Met n'eo ket eur jestr didalvoudek peogwir e teuo nerz Doue da gas da benn pezh a grogomp bremañ gantan.

Setu m'emañ ar beleg o kinnig ar bara war ar bla-denn, pedomp ha lavaromp :

« Degemerit, o Tad Santel, Doue hollo'halloudek, an ostiv-mañ, o talvezout evit hoc'h Iliz santel hoc'h eus dastumet eus pevar c'horn an douar, ma vo sakret e Jezuz Krist ha ma teuo da veza ho pobl santel ha dibabet, evit meuleudi hoc'h ano. »

Ha setu ar beleg o sevel ar c'halir ; pedomp ha lavaromp gantañ :

« Kinnig a reomp d'eoc'h Aotrou, ar C'halir a sil-

vidigez, o c'houlenn digant ho madelez ma vo douget dirak ho fas hag ho pezañs, da veza degemeret ganeoc'h evel donezon ha meuleudi ho pobl sakr, ma teuo da veza eviti kalir al levenez. »

### HO TONEZON-C'HOUI.

Setu eta war an aoter, kempennet gant daouarn ar beleg, ar bara hag ar gwin, evel donezon an iliz, evel ho tonezon c'houi hag a zo kristen, ezel eus rouantelezh Jezuz Krist. Evit an holl emañ ar beleg oc'h ofrenna, en ano kement kristen, **en hoc'h ano-c'houi.**

Lakit e-pad eur pennad dirak ho taoulagad an holl gristenien-se en em vod pep sul en holl ilizou ar bed, tud a bep bro, a bep yez, koz ha yaouank, bras ha bihan, hag a zo pobl santel Doue, gant ar memes Aotrou Jezuz Krist d'o ren en neñvou, ha war an douar e Vikel Veur, hon Tad Santel ar Pab. **Daoust hag ez eus stad ennoc'h o veza eus rouantelezh veur an Aotrou ?**

E-pad an ofereñn ne dleit morse ankouaat ez oc'h **stag ouz an holl enecou-se a zo pobl santel Jezuz.**

Soñjit en o ezommou a spered hag a gorf. Lodennoù eus ar Gristenien-se a zo argaset, boureviet evit o feiz hag evit ano Jezuz ; poaniou kriz a c'houzañvont evit o relijion ; pedit evito.

Soñjit er re a zo klañv war o gweleou, er re a vev er reuzeudigez, evit ma profint da Zoue o foaniou.

Met c'hoant an Iliz a zo ma teuo poblad ar Gristenien da greski, ha setu perak e kinnig ar beleg ar bara hag ar gwin, **o c'houlenn « silvidigez ar bed holl ».** Pephini ac'hanomp a dle pedi evit ledanidi-

gez ar feiz, ha labourat diouz ma c'hall evit ma teuo tan an neñv da gregi a bep tu.

Soñjomp en engroez divent tud an douar, paotred, merc'hed, bugale, a vev, a labour, a boagn, a varv, hep anavout Jezuz Krist hag a chom o buhez didalvoudek en abeg da se. Soñjomp er re a goll o buhez er pec'hed dre youl fall hag a samm war gein Marden, muioc'h c'hoaz a c'hlaç'har hag a reuzeudigez.

An holl dud-se, ho preudeur, petra reont eus o foaniou. N'int evito nemet krizderiou didalvoudek, darvoudou direzon. N'ouzont ket e c'hell an doan hag ar boan beza eur binvidigez. Ne reont netra ganti, nemet kreski niver o fec'hedou, en eur redek gwasoc'h gwaz war lerc'h an enoriou, an arc'hant, hag ar plijaduriou diroll.

**A, ma vefe profet gant an dud, o holl boaniou a-unvan gant re hor Salver war ar Croaz,** pegen frouezus e vije evit silvidigez, evurusted ha peoc'h ar bed ; pebez dic'haou e vije, a dalvezfe d'imp pardon hor pec'hedou.

**Ar pezh na ra ket an dud, grit evito,** en eur bedi 'vit o distro da Zoue. Ha lakit en ho kalon ar mennad da labourat en dro d'eoc'h war ho kerent, ho mignoned, tud ho micher, d'o degas d'ar santelezh. **Lakit ennoc'h eur spered katolik, a glevo ezommou ar bed holl.**

**C'houi da vihana, na gollit ket ho puhez.** Ho labour pemdeziek gant e strivadennou hag e levenez, ho puhez tiegez, ho taerou hag ho c'hoarz, hoc'h abostolerez, **kement a zo ac'hanoc'h,** setu ar pezh hoc'h eus da lakaat aze war an aoter, evit ma teuo da sevel war du an neñv dre zaouarn Jezuz.

Ra blijo ganimp lakaat war hon muzelloù hag en

hor c'halon ar bedenn-mañ a zispleg ar beleg goude beza pozet an donezonou war an aoter : « Gant izelegez-kalon hag ene glac'haret, ra vezimp degemeret ganeoc'h, Aotrou, ha ra zeuio hizio, hor sakrifs da veza dirak ho taoulagad, en doare ma plijo ganeoc'h, Aotrou Doue ».

#### **RA VEZINT SAKRET.**

Plijout a raio d'an Aotrou Doue hon donezonou, pa zeuint da veza Jezuz en e Sakrifs, pa zeuimp-ni da veza Jezuz en e santelez.

Setu perak e c'houlenn an Iliz a-hed ar c'hinnig, digant an aotrou Doue, « **DEGEMER** » hon donezonou, o benniga, da lavarout eo kas da benn ar pezh hon eus kroget d'ober. **Gant e nerz hag e c'halloud hepken e c'hell beza sakret ar bara hag ar gwin, gant e nerz hag e c'halloud hepken e vo santelaet hon eneou.**

Ar soñj-se a vo soñj diweza ar prof. Goude beza gwalc'het e zaouarn ouz korn dehou an aoter, goude beza soublet er c'hreiz da c'houlenn digant an Dreinded sakr resev hor Sakrifs en enor da visteriou buhez Jezuz, en enor da gement sant a zo bet stag e vuhez ouz e Sakrifs adalek an ebestel venniget, e tro ar beleg davet e vreudeur da lavarout d'ezo : **Orate Fratres.**

« **Pedit va breudeur, evit ma teuio va sakrifs a zo ivez hoc'h hini, da veza degemeret gant Doue an Tad hollec'halloudek** ».

Hag an daouarn astennet er vann, e lavar ar beleg **ar bedenn war ar prof, ar bedenn war an disrannadur**

evel ma veze lavaret gwechall en amzeriou kenta an Iliz, da lavarout eo ar bedenn war ar bara hag ar gwin bet disrannet diouz an implij douarel, da veza pozet dirak fas an Aotrou Doue. Hag e c'houlenn ar beleg ma vo treuzfurmet ha sakret an donezonou bet kinniget. Dre Jezuz Krist hon Aotrou, mab an Tad, a vev hag a ren gantañ er c'hloar, evel Doue a holl viskoaz, hag evel den abaoe e bignidigez en neñvou. Amen.

## 2<sup>o</sup> AR SAKRIDIGEZ

En deiz araoù ma voe boureviet, e kemeras Jezuz bara ha gwin, hag **en eur renta grasou d'e Dad, e sakras anezo...** (pedenn ar Sakridigez).

### AR BEDENN VEUR.

**Ar Bedenn veur eo pedenn ar veuleudi d'an Tad.**

Hervez ma reas Jezuz Krist e lid ar pred diweza, e fell bremañ d'an Iliz renta grasou da Zoue an Tad, o veza m'en deus salvet ac'hanomp gant e Vab. Ha penaos hen ober, nemet o lakaat en hor c'halon soñjou kalon hor Salver. Penaos meuli an Tad, nemet o profa d'ezañ ar Sakrifis a zo an digoll hag an dic'haou evit holl bec'hedou ar bed, Sakrifis ar Groaz, Jezuz o vervel evit diskouez e garantez d'e Dad, ar sakrifis a zo meuleudi an holl grouadelez d'he C'hrouer, meuleudi ar santelidi d'an hini en deus o dibabet en e drugarez.

**Sursum Corda,** « Savit ho kalonou ». Hag e respont an dud : « Emaint war du an Aotrou ! » **Setu ma krog ar Bedenn veur a gendalc'ho bremañ hep paouez, betek fin ar sakridigez, betek ar Pater.**

Hag eur bedenn veur ez eo evit gwir, pa lakaio etre hon daouarn, war an aoter, Jezuz en e sakrifis, evit ma c'hellimp sevel anezañ war du an Tad, evel hon meuleudi.

Dre ma 'z eo ar Bedenn veur eur bedenn a veuleudi, e oa ret d'ezhi kregi gant ar c'han.

**E penn kenta ar Bedenn veur en em laka eta ar beleg da gana.** Ar « **Canenn veur** » a darz war e vu-zellou :

« Ya, dleet ha just meurbet, reiz ha salvus ez eo renta d'eoc'h grasou e pep lec'h hag e pep amzer, Aotrou Santel, Tad hollc'halloudek, Doue peurbadus... »

Ya, rei a reomp eur vouez d'an holl grouadelez evit kana ho pennoziou, Aotrou Doue, Tad Santel ; bennoz evit ar bed a drid gant ar sklerijenn, evit an heol, evit ar bleun ; **bennoz d'eoc'h dreistholl, evit ar vuhez dreistnatur a sklaera evel eun heol hon ene en e vleun.**

Bennoz d'eoc'h, o Tad, **evit Jezuz Krist hoc'h eus roet d'imp d'hon savetei,** hag en deus trec'hét war an droug e splannder e garantez.

Ha bremañ e fell d'imp unani hor c'halonou gantañ, beza stag outañ en e sakrifis evit gallout kana d'eoc'h gant an Aelez :

« Santel, santel, santel, ez oc'h c'houi, Done an Aeled. Leun eo an neñv hag an douar gant ho kloar. Hosanna war al laeziou. Benniget ra vezo an hini a zeu en ano an Aotrou. Hosanna war al laeziou. »

### HOR GOULENN DRE ZAOUARN JEZUZ.

Penaos lakaat gwelloc'h hor goulennoù da sevel war du an neñv, nemet **dre o lakaat etre daouarn Jezuz Krist** da veza douget gantañ e-unan betek uhelgador e Dad, gant e garantez-heñ sur da veza degeret mat bepred.



Setu perak e ped bremañ ar beleg evit an Iliz Katolik, ledet war douarou ar bed holl. Ha c'houi, daoust hag e pedit evit hon Tad Santel ar Pab, a bouez war-nañ karg pounner renerez an Iliz hollvedel-se ?

Daoust hag e soñjit pedi evit unvaniez ha peoc'h an iliz-se ?

Daoust hag e soñjit pedi evit hoc'h Eskob, evit ho peleien, evit ar beleg a zo aze oc'h oferenna dirazoc'h, evidoc'h hag en hoc'h ano ?

Heñ a bed evidoc'h, evit kement hini a zo en dro d'ezañ hag a ginnig gantañ ar sakrifis a veuleudi. Hizio, an holl veleien hag o devo lavaret an oferenn, 350.000 anezo, o devo pedet evidoc'h.

Bremañ emañ ar c'houlz da bedi evit kement hini a garit : ho kerent, ho mignoned, ho madoberourien, hoc'h amezeien, ar beorien a anavezit.

Pedit evit ar re a garit ; ha pedit ivez evit an dud a garit nebeutoc'h, evit ar re na garit ket. Pedit evit ar re na garont ket ac'hanoc'h, evit ma teuio an unvaniez kristen da c'hounit war an eneberezh-  
kalon.

Evit ar re a zo en dro d'imp, kamaraded ha kamaradezed, er skol, er bureo, er stal-labour ; evit an implijidi, ar vicherourien, e c'hellfec'h kaout pouez warno, evit ar vugale fiziet ennoc'h gant an Aotrou Doue.

Evit an eneoù e vev dindanoc'h, hag a vezo talvoud-  
degez o buhez-den hervez skoueriu ho puhez-c'houi,  
hervez ho komzou, hervez ho pedenn.

## UNANET GANT AN HOLL SENT.

N'eo ket hepken an Iliz a-led war an douar gant

he holl ezommou a fell d'imp gwelout en dro d'an aoter, bodet da ginnig Jezuz e splannder e Sakrifis, n'eo ket hepken zoken, armeadou an Aeled o kana en neñvou, met ivez an holl Sent o deus a holl vis-  
koaz en em unanet gant Jezuz hag o deus komuniet d'e Sakrifis.

Ha da genta ar Werc'hez Vari, n'he deus bevet nemet stag ouz he mab, hag a vire en he c'halon, evit adsonjal warno, kement a lavare Jezuz, kement a rae.

### An Ebestel, ar Babed genta, ar Verzerien.

« Unanet ganto », eme ar beleg. Daoust hag emañ ennomp o c'harantez ? Ha prest e vefemp da rei evelto hor buhez da Zoue ?

Daoust hag e verv ennomp an abostolerez o lakae da vont dispont. Daoust hag e klaskomp kaout levezon mat war an dud en dro d'imp ?

O enor eo beza en em unanet gant Jezuz, beza komprenet mister Sakrifis hor Salver ha bevet dioutañ.

Setu en dro da Jezuz e heuliad sakr. Lida a reont bremañ gantañ en neñvou an oferenn beurbadus.

Ra savo betek an neñvou hon oferenn-ni evel o hini.

Ne vez ankouaet den ebet gant an Iliz. Goude ar sakridigez eo e vo pedet evit hon anaon, evit ar re a zo kousket e gras Doue hag a c'hortoz en abeg d'o fec'hedou antren er Baradoz.

C'houi hag a zo aze en dro d'an aoter, pedit evito, pa c'hellit o disamma hag o frealzi, pedit evit ho tud, evit anaon ar barroz, anaon ar vro...

Hag an Aotrou Doue da roio d'imp ivez, e Varadoz, d'imp pec'herien, ra bardono en e drugareziou.

## SAKRIFIS AR GROAZ ADDISPLEGET.

N'hon eus ken d'ober nemet goulenn digant Doue ma teuio hor c'hinnig da veza degemeret gantañ o tont da veza korf ha gwad Jezuz. Prest eo pep tra. **Hag ar beleg, dre adlavarout komzou hor Salver e lid ar pred diweza, a sakr ar donezonou.** Setu m'emaomp e kreiz an oferenn.

**Jezuz a zeu d'en em ginnig evidomp ;** dont a ra da gemer hor pedennou, hor prof a garantez d'o c'hinnig d'e Dad.

Jezuz o tont war an aoter dindan ar gwin hag ar bara ne guita ket evit se an neñv e lec'h m'emañ bremañ o ren da viken. Er Baradoz emañ o chom leun a vuhez hag a c'hloar, hag aze fas ouz fas gant e Dad, e kendalc'h d'en em ginnig korf hag ene-den da viken.

Kinnig a ra e vuhez hag e varo tremenet, e garantez a vremañ peurbardus. Rak an donezon en deus graet d'e Dad eus e vuhez war ar Groaz, ar garantez en deus diskouezet neuze a chom bepred en e galon en he barr uhela, hep fin ebet. **Kinnig a ra evidomp e sakrifis tremenet ha peurbadus koulskoude evit di-c'haou hor pec'hedou.**

## JEZUZ A ZO DEUET DA VEZA KINNICET GANIMP.

Setu eta Sakrifis ar Groaz addiskleriet dirazomp gant komzou ar sakridigez o lakaat korf Jezuz e-lec'h ar bara, e wad e-lec'h ar gwin, hag o skeudenni evelse d'imp e varo war ar Groaz.

Setu Jezuz etre hon daouarn gant ar garantez-se en deus diskouezet d'e Dad en e varo hag a zo bet degemeret gant e Dad evel ar prof plijus-meurbet. Setu etre hon daouarn hor Salver evel m'emañ bremañ en neñvou, leun a vuhez hag a c'hloar, azezet e galloud hag e nerz an Tad.

**Etre hon daouarn emañ Jezuz evit beza kinniget ganimp, evel hon donezon hag hor sakrifis.**

HO JEZUZ ez eo. **Profit anezañ, evel ma rae ar Werc'hez Vari ouz troad ar Groaz.** En em unani a rae gant he Mab, lakaat a rae en he c'halon mennadou ar Galon Sakr. Kinnig a rae he Mab, evel m'en em ginnige heñ e-unan. Lakaat a rae enni an hevelep karantez evit gloar an Tad, an hevelep kasoni ouz ar pec'hed, an hevelep truez ouz ar bec'herien. Kinnig a rae he Mab en e sakrifis evit digoll pec'hedou ar bed holl, evel ar garantez trec'h d'an droug.

A, Komprenomp pebez teñzor hon eus aze war an aoter, ar priziusa holl, Jezuz roue ar bed. Mar en em unanomp gant hor Salver, penaos ne vefe ket chenchet hon holl vuhez, penaos ne zeufe ket da veza doueek.

Setu dañvadig an Testamant nevez, Jezuz e-unan, penaos ne blijfe ket da Zoue muioc'h eget sakrifisou an Testamant koz, muioc'h eget hini Abel, eget hini Abraham, eget hini Melkisedec'h, a voe koulskoude sellet mat gant Doue, daoust d'ezo beza hepken skeudennou dister eus Sakrifisou ar Groaz hag an Aoter.

Penaos, goude d'hon pedennou beza aet dre Jezuz Krist, betek e santual an neñvou, ne ziskennfe ket

warnomp bennoziou ha grasoù an Aotrou Doue. Re-sev a raimp anezo, dont a raint betek ennomp gant largentez dre ar Gomunion.

**SAV HA DISKENN EO AN OFERENN, pignidigez hor pedennoù hag hor meuleudi betek barr an neñv, diskenn an holl vennoziou hag ar c'hras war hon eneoù. Hag an hent evit ar monedone-se, an hent nemetañ, eo Jezuz Krist en e Sakrifis peurbadus.**



## 3° AR GOMUNION

### JEZUZ FEUNTEUN AR C'HRAS.

**Emañ Jezuz, feunteun ar c'hras, war an aoter evit ma vo resevet ganimp.** Emañ Jezuz war an aoter, roet d'imp gant an Tad, evit ma vimp cheñchet ennañ. Evel m'eo bet troet ar bara hag ar gwin e Jezuz Krist gant ar Sakridigez, e tleomp ni ivez gant ar Gomunion beza troet e Jezuz.

**Petra eo komunia, nemet kemer hor perz eus ar sakrifis,** kemer hol lodenn eus ar bara hag ar gwin bet cheñchet e Jezuz, diskouez gant eur jestr e fell d'imp en em unani gantañ, beza stag outañ en e sakrifis hag en e c'hloar, resev ar c'hras en deus gounezet d'imp gant e varo.

**Petra eo ar Comunion, nemet diskenn bennoziou Doue ennomp.** Goude m'eo bet savet hon meuleudi betek an Tad en neñvou, gant ar Sakridigez, dre zaouarn Jezuz, setu ma teu adarre davedomp hon donezonou, karget gant bennoz an Tad, Jezuz enno, feunteun ar c'hras evidomp. Daoust hag e nac'himp bremañ resev ar pezh a ginnig d'imp an Tad, daoust hag e serrimp hon ene d'ar c'hras. Komprenomp mat n'eo ket echu ar Sakrifis hep ar Gomunion. Da gement hini a gompren petra eo ar Sakrifis e vo sklaer e tleer komunia al liesa ar gwella, e pep oferenn mar geller.

Petra a vir ouzoc'h a gomunia ?

Ne santit ket hoc'h ene en stad mat, dinerz eo. Muioc'h a se e tleit komunia. Boued nerzus a dleer da gemer pa santer e yec'hed o tigriski. **Boued nerzus hon ene eo Sakramant an Aoter.** N'eo ket ar Gomunion-paeamant hon meritou, met konfort ha sikour d'hor sempladurez. N'eo ket evel eun tamm gwastell a gemerer en tu hont d'ar gont, met ar bara, ar vagadurez wirion d'an ene.

Ne gav ket d'eoc'h e vefe kempennet awalc'h hoc'h ene ? Penaos ? Mar hoc'h eus pedet da vat e-kerz ar c'hinnig hag ar sakridigez, unanet ho kalon gant hini Jezuz, penaos ne vefec'h ket kempenn da gomunia.

N'oc'h ket bet o kofesaat ? N'eus ket ezomm mont da gofes evit kaout pardon e bec'hedou bihan. Pez a zo d'ober eo en em zistaga a-galon diouto, ha digeri hon ene d'ar c'hras, kaout c'hoant d'en em staga ouz Jezuz Krist : neuze e resevimp bennoziou an neñv, hep mar ebet, frouezus e vo hor c'homunion.

#### **PATER NOSTER.**

Evit aoza e ene da resev Jezuz, e krog ar beleg gant lavarout ar Bater.

Goulennit ivez gantañ, **ma teuio rouantelez Doue e pep hini ac'hanomp**, hag e pep tra. Ra vo graet e volontez ganeoc'h. Daoust hag e klaskit ober bolontez an Aotrou Doue ?

**Ra vezo roet d'imp hor bara pemdeziek.** Setu war an aoter ar bara diskennet eus an neñv, an hini a zegas d'imp an nerz. Goulennit eta ma vo resevet gant frouez hizio ganeoc'h. Ha mar goulennit evit

gwir ho para pemdeziek, mar c'hoantait da vat kaout bara hoc'h ene, ar bara n'hall ket an ene tremen hepdan evel n'hall ket ar c'horf chom hep bara an douar, penaos ne glaskfec'h ket dioustu e zegemer ? Ar beleg bremaik, a ziskouezo d'eoc'h an ostiv sakr hag a ziskenno eus an aoter da rei pep a damm d'ar gristenien. Hag e chomfec'h aze war ho kador, o nac'ha kemer pezh a vez kinniget d'eoc'h ?

Nann, c'houi a fell d'eoc'h komunia. Pedi a rit evit ar re na gomprenont ket ez eo ar gomunion eul lodenn ret eus an oferenn. **Goulenn a rit digant an aotrou Doue kreski an niver eus ar gristenien virvidik a gomunio gant pep oferenn.**

Roit d'imp hizio hor bara pemdeziek. Klaskit da genta rouantelez an aotrou Doue, grit goude-se ho micher gant kalon, hag **ho Tad a roio d'eoc'h ivez bara an douar.**

#### **SAKRAMANT AN UNVANIEZ.**

Goude beza daouhanteret an ostiv vras, ha lezet da goueza en e galir eur rannig diouti, evit diskouez emañ bremañ korf Jezuz unanet gant e wad, leun a vuhez, e c'houlenn ar beleg digant hor Salver silvidigez e éne, o tegas soñj d'ezañ ez eo Salver ar bed hag en deus profet evidomp e Sakrifis war ar groaz : « Oan Doue a lam kuit pec'hedou ar bed, ho pezet truez ouzimp — Roit d'imp ar peoc'h ».

Mar deo skarzet hon ene diouz ar pec'hed e teuio ar peoc'h da chom ennomp.

Hag ar gomunion o puraat an ene, a ro d'ezañ ar peoc'h hag al levenez.

Ar peoc'h eo frouez ar garantez hag an unvaniez. Lec'h ez eus intent hag unvaniez, ez eus peoc'h.

#### **Sakramant an aoter eo sakramant an unvaniez.**

Komunia a dalv en em unani, kenunani.

Goulennit eta beza unanet gant Jezuz en doare ma n'helloc'h ken, gant gras an aotrou Doue ouz ho skoazella, beza distaget dioutañ.

Goulennit evel ar beleg, beza unanet gant kement hini a zo stag ouz Jezuz. Ar memes karantez da vervo en ho kalon evel e kalon ho preudeur, ar memes doujañs e-keñver an Tad, ar memes lañs d'ober ar mad.

**Setu oc'h stag bremañ ouz kement hini a zo e Jezuz Krist**, o karout anezañ ha karet gantañ. Santit penaos oc'h unanet gant an holl gristenien e kalon Jezuz hag en e c'hras. Gwelit aze en ho kichen tud a bep douar, melen, du, ruz, gwenn, tud a bep doare, a bep stad.

Ha penaos goude-se beza rok en e vrasoni, beza garo e-keñver ar re all, ober gaou outo, pa vezer unanet er memes komunion.

#### **RENTA GRASOU.**

Ha bremañ, petra goulenn ? nemet **ma chomo en-nomp frouez ar Komunion.**

Ra zalc'himp gant hor spered nerz ar bara hon eus kemeret gant hon genou. Ar pezh en deus roet d'imp ar beleg en amzer an douar, ra dalvezo ennomp da remed da viken.

Na vo ket kollet ganimp an nerz gounezet, met ra gendalc'himp da greski e Jezuz Krist betek an nerz den, betek ment an dud veur-se a zo ar Sent.

Goude beza gwalc'het e vizied, puraet e galir, ha goloet anezañ gant ar ouel, ez a ar beleg da lavarout ar bedenn goude komunia.

Resevet hon eus ar bara a ro d'hon ene magadurez. Goulennomp kaout bepred naon eus Jezuz Krist.

Goulennomp a-hed hon devez, a-hed hon sizunvez, servijout Doue evel ma plij d'ezañ, ha **mirout soñj eus hon oferenn.** Bremañ ne chom ken d'imp nemet **renta grasou da Zoue e pep tra.**

#### **AVIEL SANT YANN.**

Setu echu an oferenn.

Ar beleg a ro e vennoz d'an holl.

Ha mont a ra da lenn e korn an aoter pennad kenta Aviel Sant Yann :

Mab Doue a zo deuet evidomp war an douar hag en deus kemeret hor c'horf da rei d'imp e sklerijenn, e vuhez. Ha kement den a resev Verb an Tad e chom ennañ e sklerijenn hag e vuhez.

Daoust ha ne santit ket bremañ, goude beza lidet an oferenn a spered hag a galon, muioc'h a stad en hoc'h ene, muioc'h a nerz ganeoc'h. Daoust ha n'hoc'h ket kreñvoc'h evit mont a-benn-hent da ziaesteriou ar vuhez. Santout a rit Jezuz ganeoc'h, n'emaoc'h ket hoc'h unan penn.

Kompren a rit gwelloc'h e tleit beza gant Jezuz ha dioutañ, e lakaat da veza anavet gant pep den en dro d'eoc'h da veza meulet e pep tra.

Roue ar bed a zo ganeoc'h, ar Roue Reiz, ar wirio-  
nez, ar sklerijenn, ar vuhez.

---

Moulez 17, ru d'Algesiras, Brest  
*Ar Merour* : P.-Y. NÉDELEC

---

## **Studi hag Ober**

Dastumadenn drimiziek  
Rener : Loeiz ar Floc'h

**Koumanant bloaz : 15 lur**

Kas pep lizer hag an arc'hant da :

**Abbé Louis LE FLOC'H**

Vicaire à Guingamp (Côtes-du-Nord)

Compte Chèques Postaux 34.212 RENNES

---

Priz an niverenn : 18 real